

C’hwevrer –ebrel	Preizherezhioù hag emsavadegoù-naon e meur a lec’h er rouantelezh gall (ds: e stal paper livet Reveillon e Pariz d'an 28/04/1789)
5 mae	Digoradur (1añ emgav) ar Breudoù Meur e Versailhez e sal ar "Menus plaisirs". Ar wech diwezhañ e oa bodet e oa e 1614. Roll dezhi e oa asantiñ an taosoù nevez.
17 even	Diviz a rae deputed an Trede Stad disklêriiñ o strollad evel Bodadenn vroadel da lâret eo e stroll hollad ar C’hallaoued, hollad ar vroad Mont a ra get nobled ha tud ar C’hloer (Mirabeau pe abad Sieyes)
20 even	D’an 20 a viz Even 1789 en em strolliñ a reas deputed ar Vodadenn vroadel er sal ar Jeu de Paume hag o doa touet chom eno ken na vefe savet ur vonreizh. Dont a ra ivez kannaded an urzhioù arall gete da sevel ar Vodadenn vroadel vonreizhel : bodadenn karget da sevel ur vonreizh Merchiñ a ra fin ar vonarkiezh absolud peogwir en deus ket ken galloud ar roue: deroù ar vonarkiezh bevennet eo.
11 gouere	Lakaat a ra ar roue 30 000 soudard tro-dro Pariz ha Versailhez a-benn mougiñ an emsavadegoù. Necker a zo bet skarzhet, a-du get ar reformoù. Nec’het ha fulor eo ar bobl parizian e c’hellfe ar roue implij ar feulster a-enep ar Vodadenn.
14 gouere	En em sevel a ra Parizianed, galvet get Camille Desmoulins hag eo taget ar Bastille, arouez ar galloud roueel ha tidel, hag absolud. E pep kêr en em sav Gwardoù Broadel get dispac’hourien, pal dezhe eo derc’hel an urzh e kêr.
Fin gouere	War ar maezioù e fin miz Gouere e oa an Aon Bras , da lâret eo tagadennoù a-enep arouezioù ar galloud absolud (manerioù , kastelloù, ilizoù)
4 eost	Diviz a ra an Noblañs hag ar C’hloer da zilezel an deog evit ar gloer hag an taosoù evit an noblañs: torret eo an dreistwrioù , diskaret eo gwirioù an aotrouien d’an noziad 4 a viz Eost 1789: diskaret eo ar renad kozh > an ingalded er gevredigezh .
26 eost	Embannet eo get ar Vodadenn Disklêriadur gwirioù mab-den ha re ar c’heodedad : fin kevredigezh an urzhioù eo
11 gwengolo.	Goude an tabut buhezek er Vodadenn eo bet votet ar gwir veto d’ar roue, ar gwir da enebiñ doc’h ar lezennoù votet get ar Vodadenn lezenniñ, ar pezh a ya a-enep da bennaenn ar suvereniezh vroadel
5-6 here	Loc’hiñ a ra un dibunadeg a 5 pe 6000 maouez eus pobl Pariz war-zu Versailles. Da c’houlenn bara ez aent. Heuliet e oant gant dispac’herien a c’houlenne ma vefe sinet an dekredoù get ar roue ha ma teufe hemañ d’ober e annez e Pariz, evitañ da chom hep bout edan levezon ar vrientinien (privilégiés). Chou(craït) a veze: "setu ar baraer, ar varaerez, hag ar pober bihan(petit mitron) !« evit kas anezhañ betek kastell an Tuileries. Bet arouez ar galloud roueel abaoe Loeiz XIV, ne oa mui Versailles kreizenn ar Stad-C’hall
2 du	Evit diskoulmiñ kudennoù argant ar Stad c’hall e tiviz ar Vodadenn perc’henniñ douaroù ar C’hloer evit o gwerzhiñ. Kemeret eo plas tailhoù ar Renad kozh get tailhoù paeet get an holl geodediz, hervez o madoù.
goañv 1789-1790	Tabutoù get Vodadenn àr ar gwir votiñ : daoustoc’h eo evit an holl geodediz pe nemetken evit ar re binvidikañ? Lakaet eo e-pleustr ar vouezhiadeg diouzh ar sens , ar gwir da votiñ miret d’ar re a bae tailhoù a-walc’h (ar re binvidikañ da lâret eo 1% eus ar re a-us da 25 blez)

1790

27 ebrel	Krouidigezh Klub ar C'hordellidi (Cordeliers) àr intrudu Danton
Gouere 1790	Lezenn diazez ar C'hloer . Get an dud e voe dilennet an eskibien hag ar bersoned hiviziken. Rankout a raent ivez touiñ bout feal d'ar "g-Constitution".
14 a viz Gouere 1790	E-pad gouel ar Federadur » e oa dalc'het touell ar gonkardenn triliv etre ar bobl hag ar roue. 14 000 gward broadel, deuet eus pep korn ar vro,e oa bodet er “Champ de Mars”, 300 000 a dud a oa oc'h arvestiñ oute. Dirak La Fayette, komandant ar Gward broadel, ha Talleyrand, a lavaras un oferenn, e touas Loeiz XVI da zerc'hel ar Vonreizh. Tu oa da grediñ e oa peurglok an emglev etre ar roue, ar Vodadenn hag ar bobl. Met e gwirionez e nac'h ar roue ar c'hemmoù hag a zo é izelaat e vri(dignité) hag é tagiñ an hengounoù gwarantet a-viskoazh getañ.

1791

Meurzh 1791	Kalz doc'h ar veleien , anvet beleien disuj a nac'has Lezenn diazez ar C'hloer, hen ober broudet ouzhpenn get ar Pab hag a savas a-enep krenn da lezenn diazez ar c'hloer . An darn vrasañ eus kloer Breizh a oa disuj hag ar bobl dre vras a heulias anezhe.
20-25 even	Klasket en deus ar roue hag e familh,rouanez hag o bugale, d'an 20 a viz Even 1791 tec'hout kuit eus Pariz , koñsideret prizonidi get ar Vodadenn hag ar sans-culottes. Loeiz XVI é soñjal tizhout Metz dre guzh ha kavout eno armead divroidi an noblañs, èl ar Markiz de Bouillé, a c'hellehe skoazelliñ anezhañ dre adc'hounit e holl veli. Anavezet e oa e post Sainte-Ménéhould get ar mestr-post Drouet, e-tal Varennes , , harzet un nebeud kilometradoù pelloc'h, e Varennes, ha kaset da Bariz en-dro, un ambroug a-zoare ouzh e evezhiañ.
15 gouere	A-benn savetiñ ar vonreizh e tiviz ar Vodadenn diklêriañ ar roue Divizout a rae ar Vodadenn reiñ da grediñ, en desped d'ar fedoù, e oa bet « skrapet » ar roue. D'ar 15 a viz Gouere e oa mouezhiet geti un destenn oc'h embann digablusted ofisiel ar roue. Met an dispac'hourien radikal hag a zo muioc'h-mui niverus a c'houlenn ur Republik goude treitouraj ar roue, disakret ha gwelet èl « Louis an treitour pe ar Parjur(torrer le ».)
17 gouere	Get ar “Gordellidi”, diouzh o zu, e oa aozet ur vanifestadeg d'ar 17 a viz Gouere , er “Champ de Mars", evit goulenn diveliañ(=tenniñ e veli) ar roue hag ivez ur Republik. . Difennet eo get ar Vodadenn. Ar gward broadel, get La Fayette en e benn, a oa kaset diget ar Vodadenn. Tennet a rae war ar vanifesterien ha tremen 50 den a oa lazhet.
3 a viz Gwengolo 1791	Mouezhiet e oa ar Bonreizh d'an 3 a viz Gwengolo 1791, a-benn ar fin. Diazezet e oa war benaenn disrann ar galloudoù: fiziout a rae ar galloud seveniñ er roue hag ar galloud lezenniñ en ur vodadenn dilennet.

1792

20 a viz Ebrel	Ar roue hag ar Vodadenn, war atiz ar Jirondiz, a zisklêrias ar brezel ouzh roue Bohemia hag Hungaria (da lavaret eo, Aostria), a oa roet skor(soutien) dezhañ get Prusia kentizh. Ar roue Louis XVI é vagañ ar spi e teufe e holl veli dezhañ en-dro ma vefe trec'het ar C'hallaoued. Trec'het e oa arme Bro-C'hall e meur a emgann, dre ma oa gwanaet kalz get divroañ kalz a ofiserien a-enep d'an Dispac'h.
25 gouere	Ultimatum Brunswick : peget eo àr vogerioù Pariz en hañv 1792 e-barzh ur Frañs aloubet, an destenn skrivet get an dug a v/Brunswick, komandant arme Prusia, é c'hourdrouzañ, diwar un taol diskiantegzh, distrujañ Pariz ma vefe graet an disterañ droug d'ar roue. Diskouez a ra splann ar c'henemglev Louis XVI get e vreur-kaer Impalaer Aostria . Diskouez a ra c'hoazh goude goude tec'hadeg kuit e even 1791 un treitouriezh all.
10 eost	Krouet eo get ar “Sans-culotte”-ed ur gumun emsavet ha, gant skoazell ar federidi, e oa arsailhet ouzh Palez an Tuileries. Harzet e oa ar roue gant ar gannaded, a zivizas ma vefe dilennet ur vodadenn dre hollvouezhiadeg a vefe karget da skrivañ ur vonreizh nevez: ar “Goñvañsion”
22 gwengolo.	Disklêriañ a ara ar Gonvañsion embannadur ar lañ Republik , enni 749 kannad dilennet dre vouezhiadeg hollek gourel(masculin). En tu dehoù anezhi e oa ar Jirondiz hag en tu kleiz, ar Venezidi (Montagnards). Etreze ur c'hreiz dispis lesanvet ar “Blaenenn” (Plaine) pe ar "Palud" (Marais). 21/09/1792 betek miz even 1793 :galloud e oa get ar Jirondiz betek miz even 1793. 2/06/1793 -Goude : Montagnards

1793

20-21 genver.	Kondaoniñ a ra ar Gonvañsion d'ar marv ar roue « Louis Capet » ha dibennet eo àr blasenn an Dispac'h (hiziv place de la Concorde e Pariz).
---------------	---

1793

20-21 genver.	Kondaoniñ a ra ar Gonvañsion d'ar marv ar roue « Louis Capet » ha dibennet eo àr blasenn an Dispac'h (hiziv place de la Concorde e Pariz).
1793-1794	Ar Spouren hag komite ar Salud publik
1794-1799	Republik ar vourc'hizien (Directoire)

1799

1799-1804	Koñsulad
9 a viz Du 1799	taol-diskar- stad d'an 18 a viz Brumaire get Napoleon Bonaparte
Kerzu 1799	Ur Gonstitution nevez , hini ar bloaz VII (miz Kerzu 1799), a lakaas etre daouarn Bonaparte, anezhañ ar C'hentañ Konsul, al lodenn vrasañ eus ar galloud. Mirout a reas evitañ e-unan ar galloud-seveniniñ a-bezh, hag ivez ur rann bouezus eus ar galloud-lezenniñ peogwir ne oa nemetañ é kaout ar gwir da ginnig lezennoù nevez. Dre ur boblvotadeg e voe degemeret mat gant ar Frañsizien

1801

Gouere 1801	Evit lakaat un termen d'an disunvaniezh o ren etre ar C'hloer-touer hag ar C'hloer-didou e sinas Bonaparte hag ar pab Pie VII ur C'honkordad e 1801. Anzav a rae ar Gouarnamant e oa ar Gatoligelezh relijion al lodenn vrasañ eus ar Frañsizien hag asantiñ a reas reiñ ur gopr dereat d'an eskibien ha d'ar veleien.
-------------	---

1802

1799-1804	Dont a ra Napoleon Bonaparte da vout Koñsul da viken
1802	Krouet eo al " Légion d'honneur " hag al liseoù

1804 ha 1815

2 a viz Kerzu 1804	Kurunet eo e Pariz
1804-1815	Napoleon Iañ: impalaer
1815	Adkemer a ra ar galloud e-pad ar « c'hant-devezh » eus an 20 a viz meurzh d'an 22 a viz even 1815 da vare e oa Loeiz XVIII é adsevel ur vonarkiezh hervez al lezenn-diazez D'an 18 a viz Mezheven, e Waterloo, e oa trec'het Napoleon da vat